

SON AR MELINER

(Dastumet ha kanet gant YOUENN DREZEN, Pont-n'Abad)

prim ha drant.

Seul ma koue-ze ar bleud er sach, ha strip ha
strep ha la-ka dei a- dar- re, Seul ma koueze ar
bleud er sach, Ar me- li- ner 'bo- ke dar plac'h.

I

Seul ma koueze ar bleud er sac'h,
Ha strip ha strep ha laka dei adarre,
Seul ma koueze ar bleud er sac'h,
Ar meliner 'boke d'ar plac'h.

II

— « A, chom trankil 'ta, meliner !
« Roga 'ri d'in va zavancher.

III

« Va zavancher 'zo satin gwenn,
« Ha koustet daou skoed ar walenn. »

IV

— « Mag e rogan, me a baeo,
« Rak arc'hant 'walc'h a zo er vro.

V

« Rak arc'hant 'walc'h a zo er vro,
« Da brena deoc'h tavanchero. »

VI

A-benn eun nao miz goude-se,
'Chomas ar plac'h war he gwele,

VII

'vit roi un aelig da Zoue
Hag eur soudardig d'ar Roue.

« Son ar Meliner » n'eman ket oman en he fez. Bez' ez eus anezi meur a stumm all, ha darn anezo gant pozou, ma c'houlont ket beza embannet, ken reut ez int. N'eusforz ; pedi a reomp ho! lennerien da gas deomp evel m'emaint emaint, ar poizioù all-se, a vefe anavezet ganto.